



## **Dav, dav, dav !**

Fichenn savet gant Silvenn Koant

### **Evit piv?**

Adalek 5 bloaz

### **Pal ar c'hoari**

Deskiñ un nebeut frazennoù

### **Doare da c'hoari**

Ober ur c'helc'had bugale roet an dorn ganto : setu an ti.

Ur bugel, er-maez ar c'helc'h `zo ar beajour en deus c'hoant mont e-barzh an ti.

Pep bugel war ar c'helc'h a c'hell bezañ un nor.

Ar beajour hag a dro tro-dro d'ar c'helc'h a chom a-sav a-dreñv ur bugel.

Skeiñ a ra div wech war skoaz ar bugel en ur lavarout ret :

« dav, dav, dav, digor din ti bihan »

Ar bugel goulennataet a c'hell respont :

1 - « ket, ne c'hellan ket » pe 2 - « deus e-barzh ma c'hellez »

1 - Ma `z eo bet respontet : « ket » ez a pelloc'h ar beajour da c'houlenn digant unan all

2 - Ma `z eo bet respontet : « ya », en deus ar bugel bet skoet warnañ da zistagañ eus ar c'helc'h ha da redek tro-dro d'ar c'helc'h pe d'an tu kleiz pe d'an tu dehou.

Ar beajour en deus da redek en tu kontrol.

An hini kentañ erruet d'an nor digor a gemer ar plas.

Ma en deus klasket ar beajour ter gwech da zont e-barzh hep dont a-benn, e vez erlec'hiet, ha roet dezhañ ur c'hastiz.

Ar c'hoari a grog adarre gant ur beajour all.

\*\*\* Da ziwall e vefe distaget mat ar frazennoù gant pephini hag ivez e vefe gortozet gant ar beajour e vefe dibabet gantañ an tu evit redek. \*\*\*